

- 31 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

9. (AN DAOU ZEN YAOUANK)

(Notenn : Ar ganaouenn-mañ skrivet well-wazh gant Milin war eil bann ar bajenn 8 ha trede bann ar bajenn 9, hep teurel ple ouzh ment ar gwerzennoù, nemet evit ar peder dibenn, a zo anezhi niv. 1 Dastumad Penwern : An daou den iaouank. Savet eo ivez e gwerzennoù 13 silabenn, pozioù peder gwerzenn kanet alies war un ton bale. Kanet eo bet da Benwern gant Jannet Kerguiduff, neerez gloan, Taole, 19 a viz kerzu 1850. Skrid Penwern a zo klokoc'h evit ur wech, nemet bepred ar c'hemmadurioù a zo luziet gantañ. Testenn Vilin a zo hep talbenn ha kentoc'h diaes da lenn .)

Selaouit eur complaisans
 great da zaou zen iaouank
 daou zen a gondition
 estimet enn ho farrez
 gant an dud a feson.
 n'ho deuz nemet unnek vloaz
 pa ho deuz en em joazet.
 partout el leac'h m'en em gavent
 enn hent gant ho loened
 ann hini en deveze gwas
 egile er sikoure
 ber e kavent ann amzer
 o tremen ho buez.
 paz int daouzek vloaz echu
 int eat d'ar c'hatekiz
 e kommansont adarre
 hag e reont ar c'hiz
 ober a reont ho zri fask
 e-mesk o ar vugale
 atao e kreske gantho
 chaden an amitie.
 setu ho zud o welet
 merk euz ho fidelite
 a lakeaz o separi
 ann eil dioud egile
 ho zud ne ouient ket
 ar finessa ho doa
 ar gcaz a ouie skriva
 hag a gase lizcrou
 er vech er sizun

°a-us : e-touez

..... (Amañ e tle bezañ ur
 poz war ar plac'h kaset
 d'ar gouent. Kv. Penwern,
 niv. 1)

da glevet ho c'helou.
echu e ra ann amzer
ma teu ar plac'h er meaz
ne deuz ket ar bouer
d'he ober leanez
ma kommansont adarre
evel ho gweach kenta
chaden an amitig
n'eo ket da zistruja.
beteg eur bloaz war n ugent
ho deuz en em heuliet
ken a ze deut ar poent
da denna d'ar billet
na pa zeo eat er gramp
evit monet da denna
e zantaz he holl vemprou
o tonet da grena
Setu na ma lavare
a vouez huel
na ma teuje ganthan
ann umero izel
en deus astennet he zourn
hag eat ebarz er renk
e teuaz ganthan
ann umero hugent.
Setu mantret e galoun
ha beuzet gant glac'har
ken a garje
beza eat e k(reiz)
ann douar
Setu ma zo
annoncet d'ezh(i)
gant he gamaraded
petra en doa tennet
na pe seurt billet.
Setu ma lavare
(aben) ma partije
e velje he liana
he lakat enn he bez.
er zul araok ma partiaz
ez int en em gavet
na da ober ho c'himiad
ez int en em laket,
ann daelou euz ho daoulagad
ken a c'hlepie ho dillat
korn ar c'hleuz arretet
ec'h ober ho c'himiad

- 33 -

(An daou zen yaouank)

/ann dae/ da Zoue
 pa rankan partia
 ouzoc'h° merk a garantez ° kompren: evit (Penwern)
 ouzoc'h a c'houlennan
 ar mouchouer zo ganeoc'h
 o sec'hi ho taelou
 me c'hallin sellet outhan
 beteg fin va deisiou.
 emeuz° a greiz va c'haloun ° = demeus (Penwern)
 (ia'ta)° va mignoun ker ° Penwern en deus : emei
 ec'h astennan va dourn
 da rei va mouchouer.
 lakit hen enn ho kodel
 (ha) dalc'hit mad dezhan
 ma n'ho pezh soulañamant
 o tonet d'her visita.° ° Penwern en deus : o sellet
 dioc'h al liou a zougit diountan
 ne vo ket hir ho konje
 c'houi a vezo taol distaol
 euz an eil hopital d'eben
 a ben eiz dervez goude e teuaz ar c'helou
 da lavaret oa maro nag he dous enn arme
 a ben ann daouzek deiz goude hi a varvaz ivez
 Doue d'ho fardouno war ho gwir galoun°. ° lenn: garan-
 tez

VVVVVVVVVVVVVV